

KANTIK INTRON VARIA GERLUAN

Diskan

Ni ho salud, Mari, o! Guerc'hez
Intron gerluan benniget
C'hui zo hor Mestrez, hor Rouanez
Hor Patronez, hor mamm garet

I

Leun oc'h a c'hrasha leun a c'hened
Bepred holl pur hag holl zantel
Dre ma z'oc'h bet gant Doue mired
Ous'ar pec'hed originel

II

Ho tiou gester chast o deus douget
Epad nao miz ho Mab Jésus
Hag ho leaz pur en deus her maget
Guerc'hez ha mamm mil gwech eurus

III

O! gant pebez teneridigez
E stardec'h var boull ho kalon
Krouer an Env, Roue an aeles
Ho mabig ker, Doue guirion

IV

Mez divezatoc'h pebez glac'har
Evidoc'h, Mamm garantezus
Pa her gweloc'h var menez Kalvar
O tivoasca poaniou skrijus

V

Aman, en ho chapel ken brudet
Savet tost da nao c'hant vloaz zo
Hon tud koz o deus oc'h enoret
Evel rouanez vras ar vro

VI

Ni fell deomp kerzet var ho roudou
Ni deuio ama d'ho pedi
Ho Mab a skuilho varnomp grasou
Dre ho taouarn, Guerc'hez Vari

VII

Intron Gerluan, gant ho pennoz
Roit deomp hon holl goulennou
Divar ho tron kaer, er baradoz
Pourve-it d'hon holl ezommou

VIII

Ni c'houlenn diganeoc'h da genta
Beza d'ho Mab, fidel beprad
Ma veritimp mont eun deiz genta
Ha ganeoc'h d'ar guir eursted

IX

Ni ho pedo c'hoaz en ho chapel
D'hon divoal en noz hag en deiz
Eus peb droug hag eus ar goal avel
A c'houes hirio eneb ar feiz

X

Ar vugale klanv, sempl ha dister
Ar re infirm ha mahanet
Intron Gerluan o! Mamm dener
Roit d'ezo nerz ha iec'ed

XI

Setu galvet dindan an drapo
Hor paotred iaouank, Guerc'hez Sakr
Grit ma vint tud kalonek ato
Dispont dizak an dud fallakr

XII

E kreiz holl danjeriou ar c'hazarn
O mirit ato chast ha pur
Pur ho c'halon, guen kann o daouarn
E kevêr pep falz plijadur

XIII

Benniget ar priedjou kristen
Ha grit ma o devo lignez
Da ober evel eur gurunen
En dro d'an daol, en o ziez

XIV

Dvoalit, pa vint var o zermen
Ha dilivrit pront ar mammou
Grit ma c'hellint rei, var o barlen
Leaz founnuz d'o bugaligou

XV


Ni erbed ouzoc'h ar bec'herien
Dreist holl pec'herien ar barrez
Grit ma c'hellint terri o chaden
Ar chaden eus ar gwall vuhez

XVI

Ouzoc'h Mari ni erbed ivez
Eneou paour ar Purgato
Eus ar baradoz, mamm a druez
Ah! d'ezo digorit an nor

XVII

Gloar da viken d'an Tad Eternel
D'e Vab Doue, d'ar Spered glan
Gloar da viken d'eoc'h o Mamm zantel
Intron Varia Gerluan!



Couplet

